

D'ar 16 a viz Eost

- E 1038, e-kichen Albe e Pannonia, **sant Stefan Hungaria**, roue, feizvonnour, abostolour e vro, dimezet gant santez Jisela ha tad sant Emerig.

Goude bezañ degemeret dre ar vadeziant an eil ganedigezh, ha digant ar pab Silvestr II ar gurunenn a roue gant an anv a "Roue-Abostol", e voe aketus da ziorren ar feiz kristen en e bobl, da aozañ an Iliz, ha da zonezoniñ ar manatioù. Roue reizh ha peoc'hus e kuitas ar bed evit an neñv da zeiz Savidigezh ar Werc'hez.

- War-dro 1379, e Voghera e Lombardia, **sant Rog**, feizvonnour.

Genidik eus Montpellier en Okitania ez eas da Roma da birc'hirinañ hag e tegouezhas gantañ treuziñ broioù bet taget gant ar vosenn. Chom a reas da intent ouzh ar glañvourion. Taget gant ar c'hleñved e tiwaskas poanioù kriz a-raok parañ trumm. Distro d'e vro c'henidik e varvas eno. E 1414 e krogas ar vosenn eno hag goude ul lidkerzh meur hag ouzh en em erbediñ outañ e paouezas ar c'hleñved neuze en em astannas e gehelerezh.

- E Breizh, er ^{V^{vet}} kantved, **sant Armael pe Arzhvael**, ganet e Pennohen (*Pen Ychen*) wd 482, a oa ur rouantelezh bihan a vro Glywysing, stok anezhi ouzh hini Gwent (ma renas tad s. Mac'hloù warni). S. Arzhvael e yeas da benitiour e Plouarzhel e Bro-Leon, ha diazezañ abati Plouarzhvael (Ploermael) e Bro-Sant-Maloù. Diskouezet e vez gant un euzhvil a skarzhas eus ribl ar Sec'h o skoulmañ e stolenn en dro d'e c'houzoug. E dad a voe Hoel Veur, a gemeras perzh en emgann Badon ha skoazellañ roue Arzhur e Gallia ; e vamm a oa sz Goupaia (Alma Pompea, Aspazia), c'hoar Riwall Meur Marzhoù, roue Devnon (mervent enez Vreizh hag hanternoz Aremorika), hag int bugale da zDeroc'h: kement-se a ra anezhañ ur c'henderv da roue s. Yuzhikael. Kenlabouret en deus gant s. Mewen.

- E 1129, **ar gwenvidig Raoul ar Fusteg**, manac'h, diskibl sant Roperzh Ervrezhel, diazezeur abati Sant-Sulpis-ar-C'Hoad e Bro-Roazhon.

D'ar 17 a viz Eost

- E 310, e Sikilia, **sant Euzeb**, pab.

Harluet e Sikilia gant an impalaer Maxencius e varvas eno. E gorf avat a voe degaset e bered Sant-Kalist Roma.

- War-dro 274, **sant Mammez pe Mamers** (Lt. Mammas, Gl. Mammès pe Mamant), penitiour ha merzher eus Kaezarea e Kappadokea.

Ganet e oa e Gangra e Paphlagonia en Azia-Vihanañ, er c'harc'har ma veze dalc'het e dud sant Teodod ha santez Rufina, anezho kristenion feizvonnourion. Goude o marv e voe advabet an emzivad gant ur vaouez santel anvet Ammianna hag e teuas da vezañ mesaer er menezioù. Eno e vevas evel ur penitiour gronnnet gant loened en em blije en e gavandenn. Ne oa nemet pevarzek vloaz pa voe harzet ha merzheriet da vare heskinadeg an impalaer Aurelianus. Meulet eo bet gant sant Bazil ha gant sant Gregor Naziañs hag e voe brudet tre en ilizoù ar Reter kerkent hag er IV^{re} kantved. E relegoù a voe treuzkaset da Langres e Bro-C'hall da-geñver ar C'hroaziadegoù.

- E 1736, e Saumur e Bro-Añjev, **santez Janed Delanoue**, gwerc'hez, diazezeur.

Goude ma voe skoet e spered gant ur brezegenn hag hi tost d'he gweneion en he stal-genwerzh bihan, e tegemeras en he zi emzivadeged, kozhiadeged, klañvourion, maouezed kollet hag e tiazezas Ensavadur C'hoarezed Santez Anna ar Ragevezh.

- E 1808, en Epiros e menezioù ar Balkanoù, merzherenti **sant Dimitrios ar Yaouaer**.

War-lerc'h an emsavadeg c'hwitet enep an Durked e kanteas dre ar vro evit frealziñ ar boblañs hag embann an Aviel betek an deiz ma voe harzet. Diwaskañ a reas boureviadur ar plouz korz silet dindan an ivinoù, da c'houde e voe skourret dre an treid a-us d'ur brazaouer gant koad rousin o teviñ hag en diwezh e voe mogeriet ez vev, e benn nemetken o tont er-maez ha lezet evel-se da vervel.

- E Breizh, merzherenti **ar sent Goulc'hion ha Gulian**, bet taolet en ur puñs e parrez Hentieg e Bro-Naoned.

- En Iwerzhon : **sant Finnán**, a savas un iliz e Cill Finnán ; **sant Eoin MacCarláin**, manac'h ; **sant Teimhnean**, manac'h.

- E 1898, **Diazeidigezh Abati beneadezed Sant-Mikael Kergonan**.

- E 1879, en Iwerzhon, **emziskouezadenn ar Werc'hez Vari, sant Jozef, sant Yann Avielour a-gevret gant an Aotrou dindan stumm an Oan e Cnoc Mhuire**.

D'an 18 a viz Eost

- E 138, en Illiria, merzhereti **ar sent Flor ha Laor**, brudet-kenañ en Albania hag e Rusia lec'h ma'z int gwarezourion ar c'hezeg.

Hag int gevelled, benourion maen eus o micher, e voent heskinet en abeg d'o feiz, staget ouzh rodoù kirri hag en diwezh taolet en ur puñs.

- War-dro 328, e Roma, **santez Helena**, impalaerez, mamm Kustentin Veur an impalaer kentañ a zeuas da vezañ kristen.

Mont a reas da Jeruzalem evit dizoleiñ ar Groaz Santel a zegasas da Roma. Hervez hengounioù breizhveurek e oa ur briñsez kelt anezhi.

- En III^{de} kantved, merzherenti **sant Agapid**. Edo e-touez ar 15 den yaouank bet merzheriet e Palestrina nepell diouzh Roma.

- **Sant Pacificus**, bugel merzher roman a vez miret e relegoù e kouent C'hoarezed Bihan ar re Baour e Sant-Pern e Bro-Sant-Maloù.

- **Merzherion Pontonoù Roc'hkreñv**, en o zouez **ar Gwenvidig Yann-Vadezour de Souzy hag e geneiled**, beleion ha leaned, lezet da vervel war bigi-bac'hañ e beg ar stêr Charentez etre 1794 ha 1795.

- E Breizh, **sant Aegad pe Adgad**, manac'h a gaver roud anezhañ e Plagad, e Plegad-Moezan hag e Plegad-Gwerann e Bro-Dreger.

- En Iwerzhon, er VI^{vet}-VII^{vet} kantved, **sant Ernin pe Ernán**, manac'h.

- E Bro-Skos, **sant Inan pe Evan**, manac'h e Iona ha penitiour en Irvin, e North Ayrshire.

- War-dro 560, **sant Dage**, eskob Inis Caoin en Iwerzhon, diskibl sant Finnian, keneil sant Caorlan.

- E Breizh c'hoazh, er XV^{vet} kantved, **ar Gwenvidig Steven** (Gl. Etienne), breur minor.

D'an 19 a viz Eost

- E 305, merzherenti **sant Andrev ar Stratilat hag e geneiled**.

Tribun e lu an impalaer Maximianus Galerius e voe gonezet d'ar feiz gant e soudarded, 2500 anezho. Diskuliet evel kristenion e voent lazhadeget, daoust d'o gwazerezh mat ha feal, gant bagadoù ar prefed Seleucus e dibunadeg Menez Taurus.

- War-dro 305, merzherenti **sant Timozeoz Gaza**.

Da vare heskinadeg Diocletianus e tiwaskas meur a voureviadur hag en diwezh e voe dêvet war ur bannac'h tan.

- E 440, **sant Siks III**, pab.

Klask a reas distañ hennon gant patriarkelezh Antiokeia hag hini Aleksandria. Adsevel a reas brientiliz Santez Varia Veur war an Eskilin e Roma hag he lakaas da ginklañ gant mozaikoù meurdeus.

- E 1157, **ar gwenvidig Gerig** (Gl. Guéric), abad.

Kelenner e oa e skol iliz-veur Tournai e gêr c'henidik kent mont da heul sant Bernez e Clairvaux ha dont da vezañ e ziskibl karetañ. Anvet e voe abad Igny en eskobiezh Reims e 1138.

- E 1680, e Caen **sant Yann Eudes**, beleg ha diazeour.

Ezel eus Kongregadur an Oratoer en em roas d'ar brezegerezh er parrezioù, dreist-holl e Normandia, a-raok diazezañ Kondregadur Jezuz ha Mari, anvet "Eudisted" hag int gouestlet da stummidigezh an danvez beleion er c'hloerdioù, ha leanezed Itron-Varia ar Garitez. Gant kalz a c'hred e vrudas an deoliezh da galonoù Jezuz ha Mari daoust d'ar jañsenouriezh o ren a-benn da diorren "buhez ha rouantelezh Jezuz en eneoù kristen". Diazezañ a reas kloerdi bras Roazhon.

- E Breizh, e 622, **sant Gwennin pe Tewennin**, diuzet eskob Gwened e 618, genidik eus Maelestreg en eskobiezh-se.

- E Kembre, er VI^{vet} kantved, **sant Padarn**, diazeour Llanbadarn Fawr.

Ganet eo en Arvorig, mab santez Gwenn pe Yulizh ha sant Petran hag a yeas da benitiour en Iwerzhon. Padarn a zeuas ivez da vezañ manac'h hag e treuzas ar mor gant ur bagad niverus a venec'h evit diazezañ abati Llanbadarn Fawr e Ceredigion e Kembre. Bez' e voe e darempred gant sant Samzun ha dreist holl gant sant Dewi ha gant sant Teliav. Kontet e vez ez rejont o zri da birc'hirinañ betek Jerusalem lec'h ma voent eskobet gant an henaour. Da c'houde ez eas Padarn da weladenniñ e dad en Iwerzhon. Evit lod e tistroas d'e vro hag e voe zoken eskob Gwened kemmesket m'eo e vuhez gant hini sant Padarn Gwened.

- En hanternoz Enez Vreizh, er V^{vet} kantved, **sant Solenn**, diskibl sant Palladius.

- E Kembre, er V^{vet} kantved, **sant Kledeg**, manac'h e Nantcarfan, merzher, mab an tiern Kledwen, breur sant Dediv.

- E Kembre, er V^{vet} kantved, **sant Dediv**, manac'h e Nantcarfan, breur sant Kledeg.

- E 639, **sant Berzhou**, abad Bobbio.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **sant Mochta**, eskob-abad Lughmadh, diskibl sant Padrig.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Enan Drumrath**, manac'h e kontelezh Westmeath.

D'an 20 a viz Eost

- Er I^{añ} kantved, **sant Amadour**, penitiour en Okitania.

Hervez an hengoun, en dije dilestret e Marsilha a-gevret gant Lazar, Marta, Maria ha diskibled all argaset eus Jeruzalem. O c'huitaat a reas evit klask an digenvez hag e reas e annez e troad ur roc'h serzh deuet da vezañ Roc'h-Amadour. Eno e lezas an delwennig eus ar Werc'hez Vari a oa bet roet dezhañ gant e vignon Zache hag a vez kehelet dizehan abaoe betek e porzh Kameled e Kernev.

- E 362 e Persia, merzherenti **ar sent Heliodorus, Dosa, Marial, Abdiz hag o c'heneiled**, anezho daou c'hant pemzek merzher ha tri ugent, boureviet betek ar marv war urzh ar roue Sapor II.

- War-dro 463, **sant Mesm pe Maks**, abad e Chinon.

Da gentañ diskibl sant Varzhin, e voe manac'h war Enezenn Santez-Barba e Lugdunon lec'h ma reas anaoudegezh gant luskad manac'helezh Provensa deraouet gant Yann Kasian, a-raok sevel ur manati e Chinon war ribl ar Viena.

- E 651, e Bro-Saoz, **sant Oswin pe Oshin**, roue ha merzher.

Hag eñ mab Osrik, roue Deira, e skoazellas sant Aezan goude marv e genderv sant Oswald. Oswiu, roue Bernisia en hanternoz Bro-Saoz a zisklêrias ar brezel dezhañ hogen e nac'has Oswin en em gannañ hag e tec'has da Gilling lec'h ma voe trubardet gant ur mignon ha lazhet gant tud Oswiu a adunanas Norzumbria.

- E 684, **sant Filberzh**, kentañ abad Nervouster.

Desavet e lez Dagoberzh a Vro-C'hall e wiskas ar sae vanac'h d'e 22 vloaz en abati Rebais lec'h ma warlerc'hias sant Agilius diskibl sant Koulman. Diwezhatoc'h e tiazegas manati Jumièges nepell diouzh Rouen hag hini Nervouster lec'h ma varvas. Abalamour d'an aloubadegoù norman e voe kaset e relegoù da abati Deas (Grandlieu) e Bro-Naoned ha da c'houde da abati Tournus e Burgondia.

- E 1153, **sant Bernez**, abad ha doazhour eus an Iliz.

Ganet e 1090 e Fontaine-lez-Dijon e Burgondia ez eas yaouankik flamm da abati Citaux, o tegas d'e heul e bemp breur, tud kar ha mignoned. D'e 25 bloaz e voe karget da ziazezañ abati Clervaux. Dre e skridoù hag e brezennoù en deus bet levezon vras-meurbet war Iliz e amzer. Astenn a reas an urzh kisterkiat dre holl Europa ha pa varvas e oa bet diazezet 343 abati ha lod e Breizh gant skoazell an dugez gwenvidik Ermengard.

- E 1866, e Roma, **santez Maria de Mattias**, diazevourez Leanezed Azeulerezed Gwad ar C'hrist gant ar pac'hiad Giovanni Merlini hag awen sant Gaspar del Bufalo.

- En Iwerzhon, **santez Lazarez**, maouez santel.

D'an 21 a viz Eost

- E 257, **sant Privad**, eskob Mende e Okitania, merzher.

Pa voe aloubet ar vro gant ar Vandaled ez eas da yuniñ ha da erbedin en ur c'hev lec'h ma voe diskuliet ha lazhet dre ma nac'has teurel da breizh e dropellad sezizet hag aberzhiñ d'an idoloù.

- E 479, **sant Sidoan Apoliner**, eskob Arvernais (Clermont) e Bro-Arvern.

Ganet e Lugdunon en un tiegezh uhelidi e teuas da vezañ, goude e eured, barzh kefridiel lez Roma ha prefed Kêr-Roma. Prestik goude bezañ aet da gloer e voe anvet eskob Bro-Arvern lec'h ma talas

ouzh fervder ar Varbared. Gant e lizhiri hag e varzhonegoù emañ e-touez gwellañ skrivagnerion e c'hrez.

- Er VI^{vet} kantved, **sant Avit**, eskob Clermont, breur sant Bonitus e ziaraoger.

- E 852, merzherenti **ar sent Kristof** ha **Leovigild**, manac'h e Kordoba (Gl. Cordoue) en Andalusia,.

Da vare heskinadeg ar vMaored ez ejont da gaout ar barner ha da embann o feiz pezh a dalvezas dezho bezañ skoet, karc'hariet ha lazhet.

- E 1914, e Roma **sant Pius X**, pab. Lec'h-ouzh-lec'h person parrez, eskob Mantova, henaour Venezia hag en dibenn eskob Roma e tibabas evel ger-stur « *Omnia instaurare in Christo* », ar pezh a sevenas gant eeunded ene, paourentez ha nerzh.

E-pad an unnek bloavezh eus e babelezh e tifennas taer ar feiz ha frankiz an Iliz, e herouezas addizoloidigezh ar c'han gregorian hag adsavidigezh ar liderezh, ec'h adsavas kelennadurezh sant Tomaz Akwino. E 1914 e c'hourbannas ent-kefridiel santez Anna da Baeronez Breizh.

- Er VI^{vet} kantved, **santez Yuna** pe **Yunid**, c'hoar sant Gwenvael pe Envel, Patromez ar votaerion. Ur chapel zo gouesllet dezhi e Plounevez-Moedeg e Bro-Dreger

- En Iwerzhon, **sant Sionnach**, eskob-abad Clúain Ioráird.

- E 1631, **An Tad Loeiz Polart**, lesanvet "Loeiz Montroulez", lean kabusin. Genidik eus Plouezoc'h e varvas oc'h ober war dro bosennidi Montroulez.

D'an 22 a viz Eost

- **Mari Rouanez** : Eñvoradur bet ensavet gant ar pab Pius XII e 1954, en enor d'ar Werc'hez Vari, ar vaouez "*gwisket gant an heol*, eme sant Yann e Levr an Diskuliadur, *al loar dindan he zreid, ha war he fenn ur gurunenn daouzek steredenn*" mamm "*d'an hini a zle ren an holl vroadoù*" (kv. Disk. 12).

E Breizh e kehelomp Mari rouanez an hollved ha rouanez hor bro "*evel m'o deus graet hon tadoù en amzerioù kent*, eme Maodez Glanndour, *oc'h en em ouestlañ dezhi hag ouzh he dibab da Rouanez war gement tra a raimp.*"

- War-dro 275, merzherenti **sant Siforian**, dic'houzouget d'e ugent vloaz.

Ganet e Augustodunum a oa c'hoazh er baganiezh e voe desavet er feiz kristen gant e dad sant Faust, prester e gwazerezh ar c'hoñsul roman, hag e vamm santez Aogusta. Dre ma nac'has aberzhiñ d'an doueez Sibel e voe skoet, karc'hariet ha barnet d'ar marv.

- E 417, e Toledo, merzherenti **sant Fabrig** pe **Fabrisian**, eskob kentañ Porto e Portugal.

- E 1285, e Todi en Ombria, **sant Fulub Benizi**, beleg ha pennrener urzh Servijerion Maria.

Genidik a Firenze e oa mezeg yaouank pa'z eas d'an urzh-se nevez diazezet. Galvet e voe gant ar pab Gregor X da gemer perzh e Senez Lyon e 1274, bet galvet evit labourat e sell d'an unaniezh etre ar C'hresianed hag al Latined.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Beoghna**, abad Bangor.

- E 880, **sant Andraz** pe **Andrev "ar Skosad"**, manac'h iwerzhonat, breur sant Donnost pe Donat, eskob Fiesole en Italia, lec'h ma voe e arriagon.

- E 1679, e Hereford e Bro-Saoz war harzoù, merzherenti **sant Yann Kemble**.
Hag eñ beleg e rankas pleustriñ e waziadezh dre guzh e-pad ouzhpenn hanter kant vloaz hag en diwezh e voe harzet d'an oad a 80 bloaz, kondaonet d'ar marv dre ma oa beleg ha krouget.

